



Annaig LE GORJU (*Kan*)

11 - D'an traoñ gant ar c'hoadoù (Traditionnel)

Cette chanson a été collectée auprès de Lomig Doniou, Mme Le Vève et Manu Kerjean.



D'AN TRAOÑ GANT AR C'HOADOU*Dans la vallée des bois*

D'an traoñ gant ar c'hoadoù pa 'z an
Mouezh ur verjelenn a glevan

Mouezh ur verjelenn trivec'h ble
E-kreiz al lann a gane gae

Berjelennig kanit ho son
Plijadur a ra d'am c'halon

O n'on ket ken evit kanañ
Gant kañvoù deus ma breur c'hoshañ

Gant kañvoù deus ma breur kalon
Zo bet beuzet e-barzh ar mor don

Mag eo beuzet ho breur kalon
C'hwï vo priñsez e-barzh en Roazhon

C'hwï vo priñsez ha rouanez
Ha douget ar vouloù dantelezh

Ha douget ar vouloù hag ar ganz
Dantelezh war beg ho mañch

*Comme je descends par les bois
La voix d'une bergère j'entends*

*La voie d'une bergère de dix huit ans
Qui dans la lande chantait gaiement*

*Petite bergère chantez votre chanson
Elle fait plaisir à mon cœur*

*O je ne peux plus chanter
A cause du deuil de mon frère aîné*

*À cause du deuil de mon frère de cœur
Qui s'est noyé dans la mer profonde*

*Si votre frère de cœur s'est noyé
Vous serez princesse à Rennes*

*Vous serez princesse et reine
Et porterez velours et dentelles*

*Et porterez du velours et de la ganse
Avec de la dentelle au bout des manches*